

# AL 9 LUR . NIV 18 KERZU 82 LANIV

## BREZHONEG !!



# PENNAD STUR

Poent eo kregiñ e Breizh gant stourmadou fetis ha dilezel an emglevioù kourmoulek hag ar prezegennoù kaer. E-keit ma komzer ken brav eus berraat ar c'hoñje e laosker Bretoned da louediñ en toull peogwir e nac'hont gwiskañ al lifre gall ...

E-keit ma komzer eus ar brezhoneg er skol e ya diwar wel ar gevredigezh vrezhoneg diwar dizh hag e tremen divrezhoneg rummadoù a skolidi. Ober a reer goap ac'ha-nomp !

Poent eo deomp tapout gounidoù sevenadurel ha politikel a-bouez. Ar C'hapes brezhoneg a rankomp diframmañ digant ar Stad, pannelloù e brezhoneg a-hed hon hentoù, ur radio e brezhoneg penn-da-benn evit Breizh a-bezh, skolioù ma vo kelennet e brezhoneg enno ... Emañ kement stur a zo, deomp-ni da ziframmañ diganto a-raok na vo re ziwizhat ar gounidoù kentañ war hent an emrenerezh hag ar sokialouriezh.

Abaoe tri bloaz endeo emacomp outi oc'h embann AL LANV, degouezhet omp gant an niverenn 18 ha prest omp da gregiñ gant ur bloavezh nevez. Meur a gemm a zo bet a-hed an tri bloaz kentañ, koulz en diskouez hag en danvezioù embannet. Kenderc'hel a raomp gant ar memes hent, klask reiñ danvez preder d'hor c'henvroiz da lakaat ar stourm evit hor bro hag hor pobl da vont war-raok, klask bezañ ur c'hroaz-hent ivez e lec'h ma vefe eskemmet menozioù diwar-benn holl gudennoù a-bouez an amzer-vremañ. Gervel a reomp en-dro hol lennerien eta da skrivañ deomp lizhiri evit degas danvez d'an daelerezh n'eus ket a wellaenn hepti, Skrivit deomp ivez da lavarout petra a soñjit eus ar pouez a vez roet d'al lod-ennoù disheñvel a zo er gelaouenn, da lavarout ivez m'ho pefe c'hoant gwelout ar gelaouenn o tigeriañ da zanvezioù nevez.

Traoù pleustrek da echuiñ, kasit deomp, mar plij, ho skodenn kerent hag echu ho komanant, ma n'eus ket tu da brenañ AL LANV en ho kêr skrivit deomp evit ma vo lakaet e gwerzh eno. Lennit ha lakait lenn AL LANV hag ar pezh hon eus embannet betek-hen "Ouzh Strak ar Gurun" efvorennoù kofje stourm ha "Koumanant Echu" bandenn dreset vrudet Tudu-Gwendal.

Un dra bleustrek c'hoazh evit echuiñ, skrivit deomp gant ar chomlec'h e brezhoneg ha skrivit AL LANV war ho chekennoù.

Setu, bloavezh mat d'hon lennerien !

## TAOLENN AL LANV

3. KEMBRE John Idris
8. EU-KADI Padrig an Habask
9. LABOUR-DOUAR Yann Vari  
'N Haridon
11. DIWAN Daniel an Doujet
13. INDIANED Divy Kervella
14. PETRA ? G.E. Pontanella
15. YEZH Padrig an Habask
16. HERR NUL HAG AN ARME
18. RADIO TOULL AN DAR Tudu
21. DIVIZ GANT JOB JAFFRE
24. AR RE-SE... Tudu
25. LABOUSED Tudu
26. AR STROLLADOU POLITIKEL  
Kargedoull
27. O VALE Erwan Kervella
28. SIOUL Herle Denez
29. LEVRIOU
30. GERIOU-KROAZ JOB
31. F.B.R.L.P.
32. B.D. gant Tudu

AL LANV CPPAP 62602 ISSN 0246-5396  
Kelaouenn diskleriet hervez lezenn.  
Renner : Patrig an Habask  
Ti-moulañ : du marin Ar GELVENEK  
AL LANV, 8 straed Enez-Vaz,  
Ar Bradeñh, 29000 KEMPER  
Kerzu 1982  
KOUMANANTOU : 50 pe 80 lur

# KEMBRE

WALE S4C YMRU  
Sianel Pedwar Cymru

Sianel Pedwar Cymru, Cws Sophia, Caerdydd CF1 9XY Ffôn (0222) 43421  
Welsh Fourth Channel Authority, Sophia Close, Cardiff CF1 9XY Telephone (0222) 43

- AN ISTOR -

Da 6 eur da noz d'al lun kentañ a viz Du he deus kroget Sianel Pedwar Cymru (Chadenn Pevar Kembre) da skignañ evit ar wech kentañ. Houmañ eo ar chadenn ez eus bet stourmet ken taer eviti a-hed ar bloavezhioù diwezhañ - miliadoù a dud o doa nac'h bet paeañ o zaosoù skinwel, lod a voe toullbac'het evit bezañ nac'h bet paeañ o zaos tele, meur a skriv onebiñ a voe lakaet sinañ, dibunadegoù bras a voe aozet, distrujet e voe binvioù ski-gnañ skinwel B.B.C. hag H.T.V. (skinwel dizalc'h e Kembre) ha toullbac'het e voe lod da vezañ iriennet ober freuz a-benn kaout ur chadenn gembraek. A-benn ar fin, goude gourdroz Gwynfor Evans da yunañ betek mervel, e tivizas gouarnamant Thatcher gouestlañ ar pevare chadenn skinwel evit ur servij kembraek. (A-raok-se o doa torret ar promesaoù bet graet gant ar gouarnamantoù kent da grouiñ ur chadenn gembraek). E Bro-Saoz e vez gouestlet ar bevare chadenn da "abadennoù minorezhel" hag anvet e vez "Chadenn 4 ar Rouantelezh Unanet".

N'eus forzh penaos, goude hir gortoz e voe kerseet kalz a Gembreiz o veizañ ne vefe ket ur chadenn gembraek gwir S.4.C. Gwir eo e vez skignet 22 eurvezh a abadennoù kembraek bep sizhun, mes ouzhpenn-se e skigner ivez 53 eurvezh a abadennoù saozneg en-dro d'an abadennoù e kembraeg - an abadennoù-se a vez skignet da eurioù disheñvel war chadenn 4 ar Rouantelezh Unanet.

An div eurvezh warn-ugent a abadennoù kembraek a vez skignet d'an eurioù se-laou gwellañ n'eo ket evel war ar B.B.C. pe H.T.V. ma veze lakaet diwezhat da noz pe abred da vintin. Ur wellaenn eo ivez an 22 eurvezh war an eizh pe dek eurvezh a veze skignet gant ar B.B.C. hag H.T.V.

# S4C Dydd Mercher Wednesday

10 Tachwedd  
10 November



## Cerddwn Ymlaen

EIRIYS PARRI a John James yw gwesteion Dafydd Iwan ac Ar Log yn yr ail ragnen yn y gyfres *Cerddwn Ymlaen* (S4C dydd Mercher, Tachwedd 10 am 8.15 p.m.)

Mae'r ddau lei ei gilydd yn adnabyddus i wylwyr teledu - Eirlys yn gantores boblogaidd a safonol sydd wedi recordio caneuon cofiadwy dros y blynyddoedd.

Brodor o Lanbedd Pont Steffan yw'r gitarydd John James, a dechreuodd berfformio ar lwyfannau lleol yn y 60au cynnar. Erbyn diwedd y degawd roedd y gitarydd o Ddyfed yn prysur ennill enw da iddo i hun, ac yn ymddangos yn rheolaidd ym mhiffr neaaddau cerdd y byd gan gynnwys y Royal Albert Hall yn Llundain a'r Olympia ym Mharis.

Er mai rag-time a berfformiau ar y cyntaf, yn fuan datblygodd ei dalent a'i diddordeb mewn pob math o gerddoriaeth boblogaidd, a bellach mae'n cynnwys darnau o bob cwr o'r byd yn ei ragnen ac ar y nifer lawr o recordiau hir o'i eiddo.

Yn *Cerddwn Ymlaen* bydd yn canu yr hen alaw Gwynreig Pant Corlan Yr Wyl ar y gitâr gydag Ar Log.

Catrin Lloyd Rowlands

Un abadenn sonerezh gant Dafydd Iwan hag Ar Log.

## - RESPONT GWYNFOR EVANS -

En un abadenn a voe skignet nozvezh kentañ S.4.C. e lavaras Gwynfor Evans e oa plijet e vije bet feal ar gouarnamant d'eo c'her hag en dije roet arc'hant ha belli d'ar S.4.C. Hervez ar gouarnamant eo S.4.C. un arnod war dri bloaz - en un doare e c'hellfe ar gouarnamant tennañ snezhi kuit a-benn tri bloaz m'en dije c'hoant. Lod o deus aon a c'hoarvezfe kement-se. N'eus forzh penaos en deus lavaret Gwynfor Evans bezañ resevet ul lizher digant unan eus ministred Thatcher a lavare e vije ret d'ar gouarnamant kaout ar broenn divrall n'o doa ket ezhomm Kembreiz a chadenn gembraek a-raok echuiñ gant an arnod ! Lavarout

a rae ivez e oa spi da ledanaat eur-vezhioù S.4.C. da 25 eurvezh ar sizhun a-benn tri bloaz.

**- KUDENNOU TEKNEL -**

Dre m'eo Kembre ur vro veneziek eo ret kaout treuzkaserien ispisial war laez an torgennoù da skignañ an abadennoù skinwel d'an traoniennoù. Dre ma skign S.4.C. war un donder nevez e talvez eo ret d'an Aozadur Skingas Dizalc'h (un aozadur a zo e karg eus skignañ abadennoù ar skinwel dizalc'h ha Sianel 4) treuzfurmiñ evel ma tere kement treuzkaser a zo ganto. Sivazh eo ul labour hir ha betek bremañ n'eus nemet 90 % eus an dud e Kembre a c'hell resev abadennoù ar chadenn nevez ! An 10 % all a vev e lec'hioù digenvez e-kreiz ar menezioù ha kembraegerien eo an darn vrasañ anezho !!

E traoniennoù poblet kreisteiz Kembre e Morgannwg hag e Gwent e treuzkaser an tele dre funioù met ne c'heller treuzkas nemet peder chadenn evit ar mare.

**Dydd Gwener S4C Friday**  
12 Tachwedd 12 November



**Pedair Cynefin**

PAM MAEN'N rhaid gwarchoù cefn gwlad? Beth yw'r peryglon sy'n wynebu'n amgylchyd naturiol ni. Beth yw efaith diwydiann ar yr ardaloedd gwledig? Pam y mae corstir yn etfeddiaeth werthiaw'r? Dyma rai o'r cwestiynau y byddwn yn ymdrin â nhw yn y gyfres Pedair Cynefin.

Bydd Gerallt Jones a Tom Pritchard, cyfarwyddwr y Bwrdd Gwarchoù Natur yng Nghymru, yn mynd ar daith Hydref o gwmpas pedair math o amgylchedd yn Nghymru: yr arfordir, y mynydd-dir, llawr gwlad, ac ardal ddwydiannol. Yn y rhaglen gyntaf bydd y dda'n teithio a gwmpas arfordir Môn, gan edrych ar hynafiaeth Ynys Llanddwyn a thiwyni Niwbwrch, ymchwil gwyddonol ar Afon Menai, ac efaith sefydliadau diwydiannol Iel Ffatri Aluiniwim Môn, Gorsaf Niwcliar Wylfa, a Glanfa Olew Porth Amlych ar fywyd yr ynyso.

Yn y rhaglen erall byddant yn edrych ar fynydd-dir gan ddechrau ar Gopa'r Wyddfa, gorffen yn arddangosfa Oriol Eryri, ac ymweld â Gwaith Trydan Dinorwig ar y ffordd, ar hen batrymau'r wlad ar Ynys Enlli, ac ar yr ymrech i adier amgylchedd diwydiannol.

Ur veaj a-hed aodou Enez-Môn.

Mat an traoù - emezoc'h - met setu Redifusion - perc'henned ar funioù o c'houlen digant o fratikoù hag-af e vefe gwelloc'h ganto resev chadenn 4 ar Rouantelezh Unanet e-lec'h kembraeg S.4.C. !! Kement-se bezit soñj, en ur c'horn-bro ma'z eus ennañ war-dro 10 % eus an dud a gomz kembraeg. (Bezit soñj ivez ez eus 53 eurvezh a abadennoù S.4.R.U. war S.4.C. !!) Fellout a rae da Redifusion lemel digant an dud pep chañs da welout abadennoù kembraeg ! N'eus forzh penaos int bet rediet da dreuzkas S.4.C. dre ar fun !!

**- ABADENNOU S.4.C. -**

An 22 eurvezh a abadennoù kembraeg a zeu eus teir mammenn bennañ - B.B.C. Cymru, H.T.V. Cymru, hag ivez embregerzhioù bihan dizalc'h. An trede mammenn a zo un dra nevez-flamm e Kembre. Krouet ez eus bet 30 embregerzh bihan gant tud barrek war an diduñ, e pep lec'h dre ar vro, d'ober abadennoù. B.B.C. hag H.T.V. o deus enfredet ouzhpenn 450 a dud ouzhpenn d'ober abadennoù. Setu he deus krouet S.4.C. labourioù evit ar Gembreiz.

Graet eo an abadennoù da zedennañ an holl - abadennoù tresadennoù bev savet e kembraeg (da skouer "Super Ted"), un arzh a zegas tregas forzh pegement d'e gamaladed - e kembraeg evel just !!), abadennoù farsus, pezhioù-c'hoari, filmoù (da skouer ar film Madam Wen - istor floderien en Enez Môn en triwec'hvet kantved - koustet en deus ar film ouzhpenn 400.000 a lurioù saoz !!) ha gouren e kembraeg ! Sur a-walc'h e plij kalz d'ar dud war ar maez e Kembre ar gouren, kement ha ken bihan m'en deus en em lakaet ur c'hembraeger gourener da sevel un heuliad abadennoù war ar gouren gant ar varn ha pep tra e kembraeg. Bez ez eus ivez matchoù rugbi evel just gant barn e kembraeg hep komz eus an abadennoù keleier ha traoù an amzer-vremañ e kembraeg.

**- RESPONT AN DUD**

Hervez sifroù bet embannet da heul un enklask e-touesk an dud eo bet degemeret mat S.4.C. e-mesk Kembreiz. Sellet eo bet ouzh an abadennoù kentañ gant tost da 200.000 a dud - kement-se a zo ur siffr burzhudus ma soñjer ez eus ur 500.000 bennak a dud (hervez an niveridigezh diwezhañ) a gomz kembraeg. Ar



Ur skeudenn tennet deus "Madam Wen", ur film aozet evit S4C gant Pennan Roberts. An arzoerien a weler a zo: Iestyn Garlic, Janet Aethwy ha Derec Parry.

sifroù diwezhañ holl a ziskouez ez eus ouzhpenn 150.000 a dud o sellout ouzh an abadennoù poblekañ reoliek.

**RESPONT AR YOC'H-STLENN**

Bez ez eus lod evel just ha n'o deus ket degemeret mat S.4.C. - reoù evel Keith Waterhouse a skriv d'an Daily Mirror (unan eus kelaouennoù pemdezlek prizietañ Breizh-Veur) evit he gwallvrudañ hag evit goulenñ a-benn pevare e vo krouet ur chadenn evit an dud diot!! En un abadenn keleier eus B.B.C. Bro-Saoz ez eus bet kaoz eus pris ar chadenn hag ez eus bet damlavaret e oa bet dreist skoazellet Kembreiz !! Discofjet eo bet e skignar war-dro 300 eurvezh a skinwel e Kembre bremañ bep sizhun, mes n'eus nemet 22 eurvezh e kembraeg !!

Evit ar pezh a sell ouzh Bro-Gembre a-bezh (gant Kembreiz digembraek e-barzh) e vez priziet muoc'h S.4.C. eget B.B.C. 2 (eil chadenn ar B.B.C.) e-keñver niver an eurvezhioù a weler e Kembre. E Bro-Saoz eo kalz bihanoc'h niver an dud a sell ouzh S.4.R.U. eget hini ar re a sell ouzh B.B.C. 2.

Kement-se a ziskouez ez eus ur gwir ezhomm eus ar chadenn skinwel-se e-mesk Kembreiz hag eo prest ar re-mañ da sellout ouzh abadennoù mat e kembraeg.

Abadennoù kembraek S.4.C. a vez gwerzhet dija da embregerezhioù skinwel eus broioù all. War a soñjer e vo gwerzhet tresadennoù bev "Super Ted" evit ouzhpenn 100.000.000 a lurioù saoz evit ar pemp bloaz a zo o tont hepken. Cheñchet e vez yezh ar mouezhioù er filmoù hag er pezhioù-c'hoari, hag e vezont diskouezet war chadenn 4 R.U. ha gwerzhet da vroioù all.



Un heuliad filmoù bihan o kontañ an darvoudoù a c'hoarvez gant ur paotrig bihan e-pad an eil brezel bed. Iola Gregory ha Richard Love eo an arzourien.



Superted - y tedi hud



Rhiannon Tomos

# S4C

Sianel Pedwar Cymru

WALE S4C CYMRU  
Sianel Pedwar Cymru  
Sianel Pedwar Cymru, Cae Gwyn, Caschwal, CF7 9RT, Ffôn: 0223 43401



Gari Williams

### - PETRA EO SONJ AN DUD ?

Abred eo c'hozh da varn live abadennoù S.4.C. ha da velet ha dalc'het e vo an niver bras a dud a sell outi. Hogen, soñjal a ra an dud eo mat al live ha dedennus an abadennoù. Steuziet eo en arguzennoù a-enep ar chadenn kembraek, kerse eo ganeomp memestra e vefe kement a dud ne resevient ket ar chadenn hag e vefe kement a saonneg war ar chadenn. Emichañs e wellaio kement-se hep ket a zale. Cymdeithas Yr Iaith Cymraeg a evezh ouzh pep tra a-dost evel just !.

Pa vez kaoz a sevel un rouedad funioù dre Vreizh-Veur a-bezh da resev ar skinwel dre fun e pep ti ha pa vez kaoz ivez

eus adkas abadennoù skinwel dre loarennoù e teu sklaer e vo tu da resev etre 15 hag 20 chadenn skinwel nevez a-raok diwezh ar c'hantved. En ur pleg evel m'emaomp eo a-bouez diazezañ ur servij skinwel a zoare e kembraeg bremañ. Sianel 4 Cymru a zo ur c'hammed war an hent mat ; ret eo stourm da gaout muioc'h a eurvezhioù e kembraeg hag evit ma tegaso ar c'hresk niver ar Gembreiz a zo o teskiñ ar yezh (abalamour d'ar chadenn sur a-walc'h)ur chroñvaat d'ar gevredigezh kembraek naturel.

John IDRIS.

# EUSKADI

Gant trec'h ar P.S.O.E. er votadegoù eo cheffchet kempouez an nerzhioù politikel e Bro-Spagn. Ar muiañ niverhollek a zo gant ar sokialourien en dael. Digresket spontus eo pouez ar P.C.E. hag an U.C.D. Chom a ra eta daou nerzh pennañ, ar sokialourien a-bell ar re grefvañ hag an tu dehou, hini Fraga IRIBARNE. Daouduegezh bremañ eta en darempredoù politikel e Bro-Spagn.

E Bro-Euskadi a-bezh eo kreffvaet pouez ar strolladoù broadelour euskarek (abertzale) mes dont a ra ar P.S.O.E. e penn. 12 sez kannad ha 30,95 % eus ar mouezhioù. Ar P.N.V. a chom an hini kreffvañ er proviñsoù euskarek ofisiel, 26,66 % eus ar mouezhioù en deus tapet. Herri BATASUNA hep e zaou rener MONZON hag ORTZI a ra 14,16 % hag Euskadiko Ezkerra 6,76 %. An holl strolladoù euskarek a dap 47,58 % eus ar mouezhioù, war grefvaat a ya al lusk abertzale e Bizkaia ha Gipuzkoa, dipitus e chom e Nafarroa.

Petore dazont eta d'an demokratelezh e Bro-Euskadi, petore dazont d'ar vroad euskarek ? E.T.A. a zalc'h da stourm ouzh "dallentez ar gouarnamant spagnat e-kefver Euskadi hag an Emsav Broadel euskarek. Lazhet o deus ar jeneral Lago ROMAN d'ar 4 a viz Du, arabat disofjal en doa hemañ kemeret perzh en eil brezel bed skoaz ouzh skoaz gant an nazied ...

Hervez e klaskfe ar gouarnamant nevez digeriñ divizoù gant E.T.A. Militar. Mes pemp poent diazez a zo d'an arsav brezel. "Keit ha ma vo stourmerien euskarek harluet pe doullbac'het, keit ha ma vo dalc'het Euskadi gant armeoù estren, keit ma vo lakaet da dra zister yezh Euskadi, keit ha ma vo korvoet ar vicherourien gant lezennoù direizh, ne vo tu da grediñ er cheffchamant", a lavaront. "POR EL CAMBIO" a embanne ar P.S.O.E., gortozomp da welet !

Padriq an HABASK

# SKRID

DANEVELLOU-BARZHONEGOU  
TROIDIGEZHIOU

RENER : GWENDAL DENEZ

KOUMANANT EVIT 4 NIVERENN:  
40 LUR DA BER DENEZ  
AR RI, FLOARE,  
29100 DGUARNENEZ

## DEIZIATAER 1983 SKOL AN EMSAV

Kustumet eo deut an dud da vezañ bremañ gant an deizistaez a vez kinniget dezho bep bloaz, e brezhoneg penn-da-benn, gant SKOL AN EMSAV.

Luc'hskeudennoù kaer ennañ c'hoazh er bloaz-mañ ; kavout a rit e-barzh traoù ken talvoudus ha niverennoù post parrezioù Breizh gant an holl anvioù e brezhoneg, un tamm karned evidoc'h da skrivañ chomlec'hioù ha niverennoù bellgomz ho mignoned, ur bern titouroù diwar benn ar strolladoù sevenadurel ha politikel, ar sindikadoù, ar c'helaouennoù dre skrid pe dre gomz, ar c'hreizzennoù sevenadurel, ar strolladoù c'hoariva...

30 lur e kouste deoc'h ma prenit anezhañ dre lizher digant SKOL AN EMSAV 8 straed Hoche - 35000 ROAZHON ha 27 lur an tamm ma prenit 10 pe ouzhpenn !

EUZHVIL-EUZHVL-EUZHVL-EUZHVL-EUZHVL  
EUZHVIL-EUZHVL-EUZHVL-EUZHVL-EUZHVL  
EUZHVIL-EUZHVL-EUZHVL-EUZHVL-EUZHVL

E ROAZHON EMAOC'H O CHOM ? NEUZE EO ARA  
BAT DEOC'H C'HWITAN WAR WAGENNOU RADIO-  
ROAZHON (91,5 Mhz) BEP MEURZH ETRE 9.00  
EUR HA 10.00 EUR DEUS AN NOZ AN ABADENN  
EUZHVL E BREZHONEG PENN-DA-BENN. SAVET  
EO AN ABADENN GANT GI-EDER FONTANELLA  
HA LEONID ROSKO-POUDING. KELEIER, FENT  
HA MOUSFENT, POLITIKEREZH HA GARZHAJOU.  
SONEREZH DREIST. SELAOUIT EUZHVL.....

# BREIZH

## DIAESTERIOU AL LABOUR-DOUAR E BREIZH

Gounit e damm buhez war ar maez n'eo ket anat avat en 20vet kantved, daoust d'e reveulzi deknikel, tra ma kresk priz an danvezioù prenet gant ar c'houer ha ma tigrak ar pezh a werzh (s.o. Al Lanv Nn 17). "Dibabet 'vez ar priz gwerzh gant dileuridi holl vroioù ar c'henvarc'had (Economic Common Market) emvodet bep bloaz e Brussel (Belgia). Gouarnamant n'eus forzh peseurt bro a fell dezhañ derec'hel prizioù an izelañ posupl.

### Perak 'ta ?

- Evit bezañ gouest d'ermaziefañ (exporter) daoust d'ar c'hevezerezh (konkurañs) etrevroadel,

- Evit ma chome izel koust ar vuhez (ahend-all e vije ret kreskiñ gopradoù an holl dud),

- Evit mirout talvoudegezh ar moneiz, ambilher (keflusker) nemetañ an armerzh :

Ret eo d'ur vro ampletif fonnus ha marc'hadmat da vezañ kevezus (compétitif) Da larout eo, gant ul lur gall e tleer bezañ kad da brenañ ar muiañ posupl a vadoù.

Dalc'homp ar sell war broioù paour an "trede bed" ; n'eus forzh peseurt hini deus outo, hag a waskomp ni, a zo gouest da ampletif gant prizioù marc'hadmatoc'h egedomp. Kevezet splann omp ganto (efed amsteriek an impalaerezh neketa ?).

### UR GUDENN A BOELL

Ar prizioù diazezet e Brussel a vez a-wechoù (alies) izeloc'h 'vit koust an oberiadurezh. Da lavarout eo, gwerzhet 'vez danvezioù 'zo marc'hadmatoc'h eget ar pezh 'vez dispignet d'o aczañ.

Setu 'ta, ma'z eo ret d'al labour-douar chom hep bezañ steuziet ha lamet mik, lakaat ar rannad-se da dreuzvefañ dreist al langis a vo dav ivez.

### Penaos ?

- En un reif skodennoù pe yalc'hadoù d'ar gouerien,

- Dre c'hoproù ermaziefañ,

- Dre c'hoproù hervez kementad an danvezioù pourvezet. Evel just, n'en do ket pep kouer memes skodenn arc'hant digant ar gouarnamant pe ar c'henvarc'had (E.E.C.). Komprenet 'peus ! Kevreizhenn (hervez) ar fonnusted 'vo ar yalc'hadoù-se. Muioç'h a "skoazell" 'vo eta evit ar re binvidik;

Ret eo a-benn ar fin, da vezañ gopret ampletif muioç'h-muiañ zoken ma'z eo dreist-stanket ar marc'had. N'eus nemet un dra hag a vez goulennet digant ar gouerien : Ampletif kalz. Ampletif bevidigezh a zoare a zo ur goñchenn dianavez.

### PRIZ AL LABOUR PE UN ISTOR A CHADOKED

Diazezet eo gounid ar gouerien diwar ar reizhiad treuzgoprañ-se. Aes eo ijiñ an disoc'h :

- Rannet eo muioç'h-mui ar gouerien etre neur a renkad (ar re baour, ar re binvidik), pezh a glot gant diunvaniezhioù o sindikajoù : F.N.S.E.A. (Mirourien), F.D.S.E.A. (Araakourien e Breizh), M.O.D.E.F., C.N.S.T.P. (a-gleiz) (1).

- Ar re baour a ya da vezañ rîfset mik pe : .....

Niver ar boblañs o labourat war ar maez e Breizh :

1950	1975
600.000	210.000

Ar pezh a ra bep bloaz etre 15.000 ha 20.000 den nebeutoc'h ha bemdez 42 den nebeutoc'h.

### Da belec'h ez a an dud-se ?

- War o leve (50 % anezho a zo muioç'h 'vit 50 vloaz),

- Da glask labour (da belec'h 'ta ?) (2)

Bugale ar gouerien a ya da labourat e lec'hioù all keit ma vez tu dezho gounit muioç'h diouzh ar vicher aesoc'h. N'eus nemet kresk dregantad an dilabour (1975) a vir outo da quitaat ken niverus o fark-eier.

Niver a dud o labourat war ar maez diwar niver hollek an dud o labourat

	1954	1968	1975
- Breizh	50 %	35 %	20 %
- Bro-c'hall en he fezh	25 %	15 %	10 %
- Breizh-Veur			2,5 %
- Bro-Alamagn kevredel			8 %

Ret e vo eta d'ar re a chomo da labourat war ar maez :

- labourat war un dachenn brasoc'h-brasañ da c'hounit peurluiñ nebeutoc'h eget ar rannadoù labour all.

Devezhioù arat un atant krenn

	1968	1980
- Breizh	23	41
- Bro-C'hall	33	56

- Labourat pelloc'h an devezh

- Ampletiñ muioc'h war ar memes tachenn atant,

- Ampletiñ muioc'h gant nebeutoc'h a dud,

- Ampletiñ muioc'h gant muioc'h a veka-  
nikoù ....

Kondaonet d'ar marv gant ar galloud peurgreizennet, pell diouzh Pariz, pelloc'h c'hoazh diouzh Brussel, eo en em vodet ar gouerien e kevelourioù a bep seurt da gavout diskoulmoù. Met gouzout a rit moarvat ez eo bet ret d'ar c'hevelourioù-se dont da vezañ ken efedus ha n'eus forzh peseurt "International Trust" 'vit gouzañv lezenn ar c'hevezerezh (broadel hag etrevroadel), ken efedus ..., da larout eo ken mac'ho-  
mer.

Strivoù zo bet graet a-dra-sur peogvir gant 7,7 % eus an dachenn c'hounidigezhel e-keñver Bro-C'hall eo kement-mañ a gengerzh a reer e Breizh (5 departamant) :

- Kig ejenel (leue, buoc'h, bevin)	10 %
- Laezh	17 %
- Kig moc'h	30 %
- Yer	30 %
- Pinvidigezh c'hounidigezhel hollek	+ 10 %

A-zivout ar c'hig-mor : etre 1960 ha 1970 kresk 70 % ; 1 hoc'h diwar 16 a zo breizhat er c'henvarc'had. 1 hoc'h diwar 4 a zo breizhat e Bro-C'hall. Maget int gant soja ivez. Deus pelec'h e teu ar soja-se, a gav deoc'h ?

An holl ac'hanoc'h a anavez c'hoari ar c'hevezerezh. War zigresk ez a ar priz pa teu marc'had pe varc'had da vezañ dreist-stanket gant ur c'henderc'had a zanvez fall a laka yec'hed an debrenien en arvar (kig gant ormonoù, frouezh kontammet gant louzeier a bep seurt).

An diskoulm metañ ijinet gant hon armerzherien a feson. Skarzhañ ul lodenn d'al lastez. Bez ez eus, nepell, tud o vervel diwar an naonegezh. Ur gudenn all eo avat !

Yann-Vari 'N HARIDON

(1) C.N.S.T. = Confédération Nationale des Syndicats de Travailleurs Paysans

M.O.D.E.F. = Mouvement de Défense des Exploitations Familiales

F.N.S.E.A. = Fédération Nationale des Syndicats d'Exploitants Agricoles

F.D.S.E.A. = Fédération Départementale des Syndicats d'Exploitants Agricoles

(2) Gounezet 'peus ul litrad Dimethyl Diphenyl Trichlorethan (D.D.T.) pe ul litrad 2-4 Dichlorophenoxyacetic Acid (2-4-D) da lazhañ amprevañet pe geot ho parkeier mar kavit ar respont dereat.

## DIWAN

"E ver eh ober genemp" a skrive ar barzh tri-ugent vlez 'zo. E vezer bepred, barzh paour ! A-viskoazh emaint bet mod-se : begoù bras, lareion kaer, grataerion a vicher. Dekvleadoù 'zo 'vezomp maget get o c'hozh grataerezh toull. Tu pe du, gwenn pe ruz, n'eus anezhe nemet bramerion mod-kêr, tra da c'hortoz, 'met komzoù brav.

Tud seven int, trilivet o c'halon ha prederiet bras eveljust get hor yezh hag hor sevenadur. Ur blez 'zo hanter emaint e penn, du-hont, ba' Pariz, é parlandal.

Ha ni e Breizh, é c'headal.



Kinnigadennoù nevez a zo bet a-berzh ministerezh an deskadurezh vroadel. Hana ! Brammoù nevez eta ? Eljust ! N'hellan ket, amañ, dibuniñ deoc'h gwerzennoù nevez an Ao. Savary, o lennet an eus ha ne gomprenan nemet un dra : "e vezer ec'h ober geneomp !". Emaint é c'hortoz ma skuizho ar Vretoned, emaint é klask diskouez deomp e faot d'ar meliner chom mestr d'e vilin. Emaint é c'hortoz marv hor yezh.

Hag e taint arlec'h da vered ar yezhoù marv, ur mor daelou-kj en o daou-lagad. Komzet oa bet ag ur yalc'had a

vize roet deomp. N'eo ket bet. Ha ne vo ket ma ne lakomp ket poan d'he gounit : "Si un accord sur les méthodes pédagogiques intervient entre l'Education Nationale et Diwan, cette extension dispensera Diwan d'un développement de ses activités, donc de ses charges. Dans le cas contraire, l'Association sera libre de créer ou non une école concurrente, mais dans ce cas également, les règles de la carte scolaire s'imposent pour éviter le gaspillage des fonds publics, l'obtention par Diwan d'une aide de l'Etat sera fortement compromise" (pajenn 5 ar raktres). Ne fehec'h ket bout splannoc'h !!

En amzer-hont ma oa Jiscard é ren e veze roet deomp an aluzen : 10 pe 12 million kozh pa oa 200 a rankezeomp. Ne oa ket kalz, a dra-sus, met, da nebeutaf 'vezent roet deomp dizifex.

Ha bremañ n'emañ an tu kleiz e penn e vo ret deomp marc'hata, plegañ ? bis-kozh gwazh !

Amzer n'am eus ket da vont pelloc'h na donoc'h 'barzh an tamm lizher-se, graet 'vo en nivezenn a za. Un dra avat a zo splann din : "N'eus pal ebet da raktres nevez ar ministerezh evit sevel klasoù divyezhek nemet hennañ : DISKAR AL LABOUR A ZO BET GRAET BETEK-HEW GET DIWAN, sach ar vugale o c'houlenn deskiñ brezhoneg doc'h o zu evit tizhout o fenn-pal : DISKLAB DIWAN DA VAT.

"On peut envisager en cas de souhait des familles qui envoient précocement leurs enfants dans les écoles Diwan, le transfert pur et simple des élèves de ces écoles vers l'école publique bilingue et la suppression de l'école Diwan".

An deiz arall e oa daet ar c'huzulier departamantel evit ar brezhoneg da ma gwelet barzh ar skol evit laret din e oa labour e sizhun ober tro skolioù-stad ar c'hornad evit rastella bugale d'ar c'hlasoù "divyezhek" a ginnig Savary deomp ! Kaerat labour ! "Kevezerezh a vo eme-  
ef din.

E gwirionez n'eus ket pa vehe sellet mat doc'h ar labour ha doc'h an disoc'hoù Gouest omp ni d'ober ar pezh a ginnigomp hag int, n'int ket. Gouezet a raont ha ne raont fouter ebet ; n'eo ket deskiñ brezhoneg d'ar vugale a faot dezhe : touelliñ an dud a zo peset an c'hoant-se enno an hini eo. Tra ken. Spi an eus ne vo ket dibenn a-walc'h tud Diwan evit roñf dezhe an alibi emaint é c'hortoz.

Tud 'zo a seblant bout nec'het pa welont, doc'h un tu, Diwan é c'houlenn ar c'henstagadur ha doc'h un tu 'rall, skolaerion Diwan, a lare unan din "ne ziskouezont ket bout ali, evit ur bras anezhe, get o renerion".

Ne gavan tamm drol ebet. Evidin me, kaer am eus bet klask ba' levrioù evit ar vugale, e neptu n'am eus kavet ar yar sot a-walc'h da vont da zimeziñ get ur louarn. Ha ma eh eus bet unan, sur a-walc'h emañ bet debret.

Ne vo diskoulm ebet da gudenn ar brezhoneg keit ha ma wimp edan yev Pariz.

•••••

- D'an 2 A VIZ DU 1982 a skrive J.Y. Le DRIAN, kannad P.S. an Oriant, da Skol Diwan an Oriant :

"ainsi que vous pouvez le constater, de nombreuses mesures en faveur de l'enseignement du breton ont été prises par le ministre de l'Education Nationale depuis le 10 Mai 1981".

- D'ar 14 a VIZ GOEL-MIKEL (HERE) en doa graet d'an Dael Vroadel, daou c'houlenn skrivet a-zivout ar brezhoneg. :

"Jean-Yves Le DRIAN appelle l'attention du ministre de la Culture sur la dis-

crimination linguistique et culturelle subie par la langue bretonne" (Dae) Vroadel 14/11/82).

"Jen-Yves Le DRIAN appelle l'attention du ministre de l'Education Nationale sur le caractère restrictif des mesures en vigueur pour l'enseignement de la langue bretonne" (Dael Vroadel 14/11/82).

Revendailh mah eus bet graet, e korf ar pemzektez-se, ur gammed vras en a-raok !!!

Diàr an tri lizher-se (sot a-walc'h eo bet evit o c'has deomp ar un dro, eilskeudenoù e zaou c'houlenn da c'heul e lizher d'ar skol). Eh eus unan a lar ur gaou. Pehini eo ? Setu aze danvez-kofkour evit abadennoù R.B.I. Un T. shirt P.S. a zo da c'hounit !

Daniel an DOUJET

## HOR YEZH

HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH  
HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH  
HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH  
HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH  
HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH SAVET E 1954  
GANT ARZEL EVEN. RENER : PER DENEZ  
KOUMANANT : 50 LUR DA Y;DESBORDES  
1, PLASENN CH. PEGUY - POUILLBRIANT  
29260 LESNEVEN. CCP 1499 51 ROAZHON



12

## INDIANED

### SEQUOYAH

4 V<sup>o</sup> ∞

SEQUOYAH : UR 'ROPARZ HEMON' INDIAN

Ar braz eus hon lennerien ac'h anavez indianed brudet mat evel Jeronimo, Tarv Azezet, Cochise hag all. Kalz nebeutoc'h, sur mat, a oar petra en deus graet Sequoyah. Hemañ n'eo ket ur wezenn evel ma c'hellfer krediñ, nann, graet en deus evit e bobl muloc'h eget ur bern kadourien. Ma'z eo Tarv Azezet (Sitting Bull) un doare Noinoe, ez eo Sequoyah ur "Roparz Hemon" hag ur "Gonideg" war un dro.

»  
»

Sequoyah a oa eus meuriad brudet ar Cherokee-ed, ar re-mañ a veve e su Stadoù Unanet an Amerik a-vremañ, en Tennessee ha Carolina an Norzh. Ar poblad-tud-mañ a oa ezel eus ur gevredigezh a veuriadoù indianed, chomet brudet, hini ar *Pemp Meuriad Sevenet* gant ar Choctawed, ar gCreeked, ar Chickasawed hag ar Seminoleed. Dindan o dalc'h e oa gevred a-bezh ar vro, ha se betek bro Florida. An holl re-mañ, evel ma ziskouez o anv, a oa sevenet mat. E keriñ gwirion savet gant tiez plijus bevañ enne e oant o chom, labourerien-douar e oa anezhe, ha barrek-barrek war labour ar gwriad hag ar poderezh. Diazezet e oa ar gevredigezh war ar merc'hed (i a oa perc'henn war an douaroù ha mestr an tiegezh). Bez' e oa en o fenn ur roue hag ur rouanez, dibabet evit o foell hag o furnez, ha n'eo ket evit o barregezh-kerz an emgannoù petra bennak ma oa troet an holl war ar brezelif kenkouz hag ar braz eus an indianed arall.

Deuet e oa Europiz er vro. Sikouret o doe skarzhañ ar Frañsizion hag ar Spagnoled ha kendelc'her a rejont da sikour ar Saizon a-enep d'an drevadenourien e-pad Brezel an Dieubidigezh. Tapet ar maout hag ar re zivezhañ-mañ kriz e voe bet ar re wenn en o c'hefver. Tecumeh,

o welout ar riskl bras-se, ar riskl gwenn, an dud nevez-se o kemer muloc'h-muiañ a zouar, o lazhañ, a glaskas unvanif holl veuriadoù ar c'horn-bro, ne zeuas ket a-benn. Gwelloc'h oa gant ar Cherokeeed bevañ en peoc'h. Dont a rejont da vezañ labourerien-douar ampart-kenañ, dreist-holl war ar c'hotoñs, pinvidigezh vras ar vro. Evel Europiz en em wiskjont ha galvet e voe bet gante misionerien evit sevel skolioù. Ar re-mañ, evel just, a grede dezhe ne oa ket tu da skoliata an dud e o yezh ha pep tra voe graet e saozneg. Araokadennoù an Indianed yaouank a oa tost da vat peuznul. A-boan ma ouient lenn un nebeudig saozneg goude ur bloavezhiañ skol.

E-kichen ar skol e oa un den o chom, Sequoyah a oa e anv, re c'hlozet e oa bet evit gellout labourat pe hemolc'hif, ne oa ket un den desket anezhañ, ne ouie ger saozneg ebet met kregif da studiañ azevri al lizherennoù implijet gant ar visionerien a reas. C'hoant en doa da sevel ur skritur evit e bobl. Allas, an holl a reas goap outañ. Tamallet e voe zoken outañ ober fizik ha losket dezhañ e di-plouf gant e holl baperol.



Kenkent ez eas kuit en harlu gant un nebeud tud all. Evit pellaat ouzh an dud wenn, hag ivez evit pellaat ouzh tud e hobl a oa deuet da vezañ is-tud-wenn. Treuzif a rejont ar Mississippi evit mont davit an Arkansas.

Goude daouzek bloavezh a labour kalet e voe prest pep tra, echu gantañ e lizherenneg evit gellout skrivañ Cherokeeeg. Bez' e oa enni peder lizherenn ha pevar-ugent, ul lodenn vras anezhe a oa lizherennoù roman pe c'hresian, reoù all a oa ivez, met gant un dalvoudegezh all bepred.

13

E 1821, e tistroas d'e vro, ul lizher eus perzh e vignoned chomet en harlu gantañ. Skrivet e oa e cherokeeg. Tamm ha tamm e krogas an dud da vezañ dedennet gant kement-se. A-benn ar fin, an holl, entanet a c'hoantaas deskiñ lenn ha skrivañ o yezh. Kozhidi, merc'hed, pep hini a outas e nebeut a amzer. Meuriadoù all ac'h implijas lizherenneg Sequoyah, ha miliadoù ha miliadoù a indianed a oa barrek evel-se da lenn ha da skrivañ.

Cherokee Alphabet.									
D.	R.	T.	ᎁ.	ᎅ.	ᎆ.	ᎇ.	ᎈ.	ᎉ.	ᎊ.
ᎏ.	᎐.	᎑.	᎒.	᎓.	᎔.	᎕.	᎖.	᎗.	᎘.
᎙.	᎚.	᎛.	᎜.	᎝.	᎞.	᎟.	Ꭰ.	Ꭱ.	Ꭲ.
Ꭳ.	Ꭴ.	Ꭵ.	Ꭶ.	Ꭷ.	Ꭸ.	Ꭹ.	Ꭺ.	Ꭻ.	Ꭼ.
Ꭽ.	Ꭾ.	Ꭿ.	Ꮀ.	Ꮁ.	Ꮂ.	Ꮃ.	Ꮄ.	Ꮅ.	Ꮆ.
Ꮇ.	Ꮈ.	Ꮉ.	Ꮊ.	Ꮋ.	Ꮌ.	Ꮍ.	Ꮎ.	Ꮏ.	Ꮐ.
Ꮑ.	Ꮒ.	Ꮓ.	Ꮔ.	Ꮕ.	Ꮖ.	Ꮗ.	Ꮘ.	Ꮙ.	Ꮚ.
Ꮛ.	Ꮜ.	Ꮝ.	Ꮞ.	Ꮟ.	Ꮠ.	Ꮡ.	Ꮢ.	Ꮣ.	Ꮤ.
Ꮥ.	Ꮦ.	Ꮧ.	Ꮨ.	Ꮩ.	Ꮪ.	Ꮫ.	Ꮬ.	Ꮭ.	Ꮮ.
Ꮯ.	Ꮰ.	Ꮱ.	Ꮲ.	Ꮳ.	Ꮴ.	Ꮵ.	Ꮶ.	Ꮷ.	Ꮸ.
Ꮹ.	Ꮺ.	Ꮻ.	Ꮼ.	Ꮽ.	Ꮾ.	Ꮿ.	Ᏸ.	Ᏹ.	Ᏺ.
Ᏻ.	Ᏼ.	Ᏽ.	᏶.	᏷.	ᏸ.	ᏹ.	ᏺ.	ᏻ.	ᏼ.
ᏽ.	᏾.	᏿.	᐀.	ᐁ.	ᐂ.	ᐃ.	ᐄ.	ᐅ.	ᐆ.
ᐇ.	ᐈ.	ᐉ.	ᐊ.	ᐋ.	ᐌ.	ᐍ.	ᐎ.	ᐏ.	ᐐ.
ᐑ.	ᐒ.	ᐓ.	ᐔ.	ᐕ.	ᐖ.	ᐗ.	ᐘ.	ᐙ.	ᐚ.
ᐛ.	ᐜ.	ᐝ.	ᐞ.	ᐟ.	ᐠ.	ᐡ.	ᐢ.	ᐣ.	ᐤ.
ᐦ.	ᐧ.	ᐨ.	ᐩ.	ᐪ.	ᐫ.	ᐬ.	ᐭ.	ᐮ.	ᐯ.
ᐱ.	ᐲ.	ᐳ.	ᐴ.	ᐵ.	ᐶ.	ᐷ.	ᐸ.	ᐹ.	ᐺ.
ᐼ.	ᐽ.	ᐾ.	ᐿ.	ᑀ.	ᑁ.	ᑂ.	ᑃ.	ᑄ.	ᑅ.
ᑇ.	ᑈ.	ᑉ.	ᑊ.	ᑋ.	ᑌ.	ᑍ.	ᑎ.	ᑏ.	ᑐ.
ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.	ᑙ.	ᑚ.	ᑛ.	ᑜ.
ᑟ.	ᑐ.	ᑑ.	ᑒ.	ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.
ᑛ.	ᑞ.	ᑟ.	ᑠ.	ᑡ.	ᑢ.	ᑣ.	ᑤ.	ᑥ.	ᑦ.
ᑩ.	ᑪ.	ᑫ.	ᑬ.	ᑭ.	ᑮ.	ᑯ.	ᑰ.	ᑱ.	ᑲ.
ᑴ.	ᑵ.	ᑶ.	ᑷ.	ᑸ.	ᑹ.	ᑺ.	ᑻ.	ᑼ.	ᑽ.
ᑿ.	ᑾ.	ᑿ.	᐀.	ᐁ.	ᐂ.	ᐃ.	ᐄ.	ᐅ.	ᐆ.
ᐇ.	ᐈ.	ᐉ.	ᐊ.	ᐋ.	ᐌ.	ᐍ.	ᐎ.	ᐏ.	ᐐ.
ᐑ.	ᐒ.	ᐓ.	ᐔ.	ᐕ.	ᐖ.	ᐗ.	ᐘ.	ᐙ.	ᐚ.
ᐛ.	ᐜ.	ᐝ.	ᐞ.	ᐟ.	ᐠ.	ᐡ.	ᐢ.	ᐣ.	ᐤ.
ᐦ.	ᐧ.	ᐨ.	ᐩ.	ᐪ.	ᐫ.	ᐬ.	ᐭ.	ᐮ.	ᐯ.
ᐱ.	ᐲ.	ᐳ.	ᐴ.	ᐵ.	ᐶ.	ᐷ.	ᐸ.	ᐹ.	ᐺ.
ᐼ.	ᐽ.	ᐾ.	ᐿ.	ᑀ.	ᑁ.	ᑂ.	ᑃ.	ᑄ.	ᑅ.
ᑇ.	ᑈ.	ᑉ.	ᑊ.	ᑋ.	ᑌ.	ᑍ.	ᑎ.	ᑏ.	ᑐ.
ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.	ᑙ.	ᑚ.	ᑛ.	ᑜ.
ᑟ.	ᑐ.	ᑑ.	ᑒ.	ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.
ᑛ.	ᑞ.	ᑟ.	ᑠ.	ᑡ.	ᑢ.	ᑣ.	ᑤ.	ᑥ.	ᑦ.
ᑩ.	ᑪ.	ᑫ.	ᑬ.	ᑭ.	ᑮ.	ᑯ.	ᑰ.	ᑱ.	ᑲ.
ᑴ.	ᑵ.	ᑶ.	ᑷ.	ᑸ.	ᑹ.	ᑺ.	ᑻ.	ᑼ.	ᑽ.
ᑿ.	ᑾ.	ᑿ.	᐀.	ᐁ.	ᐂ.	ᐃ.	ᐄ.	ᐅ.	ᐆ.
ᐇ.	ᐈ.	ᐉ.	ᐊ.	ᐋ.	ᐌ.	ᐍ.	ᐎ.	ᐏ.	ᐐ.
ᐑ.	ᐒ.	ᐓ.	ᐔ.	ᐕ.	ᐖ.	ᐗ.	ᐘ.	ᐙ.	ᐚ.
ᐛ.	ᐜ.	ᐝ.	ᐞ.	ᐟ.	ᐠ.	ᐡ.	ᐢ.	ᐣ.	ᐤ.
ᐦ.	ᐧ.	ᐨ.	ᐩ.	ᐪ.	ᐫ.	ᐬ.	ᐭ.	ᐮ.	ᐯ.
ᐱ.	ᐲ.	ᐳ.	ᐴ.	ᐵ.	ᐶ.	ᐷ.	ᐸ.	ᐹ.	ᐺ.
ᐼ.	ᐽ.	ᐾ.	ᐿ.	ᑀ.	ᑁ.	ᑂ.	ᑃ.	ᑄ.	ᑅ.
ᑇ.	ᑈ.	ᑉ.	ᑊ.	ᑋ.	ᑌ.	ᑍ.	ᑎ.	ᑏ.	ᑐ.
ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.	ᑙ.	ᑚ.	ᑛ.	ᑜ.
ᑟ.	ᑐ.	ᑑ.	ᑒ.	ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.
ᑛ.	ᑞ.	ᑟ.	ᑠ.	ᑡ.	ᑢ.	ᑣ.	ᑤ.	ᑥ.	ᑦ.
ᑩ.	ᑪ.	ᑫ.	ᑬ.	ᑭ.	ᑮ.	ᑯ.	ᑰ.	ᑱ.	ᑲ.
ᑴ.	ᑵ.	ᑶ.	ᑷ.	ᑸ.	ᑹ.	ᑺ.	ᑻ.	ᑼ.	ᑽ.
ᑿ.	ᑾ.	ᑿ.	᐀.	ᐁ.	ᐂ.	ᐃ.	ᐄ.	ᐅ.	ᐆ.
ᐇ.	ᐈ.	ᐉ.	ᐊ.	ᐋ.	ᐌ.	ᐍ.	ᐎ.	ᐏ.	ᐐ.
ᐑ.	ᐒ.	ᐓ.	ᐔ.	ᐕ.	ᐖ.	ᐗ.	ᐘ.	ᐙ.	ᐚ.
ᐛ.	ᐜ.	ᐝ.	ᐞ.	ᐟ.	ᐠ.	ᐡ.	ᐢ.	ᐣ.	ᐤ.
ᐦ.	ᐧ.	ᐨ.	ᐩ.	ᐪ.	ᐫ.	ᐬ.	ᐭ.	ᐮ.	ᐯ.
ᐱ.	ᐲ.	ᐳ.	ᐴ.	ᐵ.	ᐶ.	ᐷ.	ᐸ.	ᐹ.	ᐺ.
ᐼ.	ᐽ.	ᐾ.	ᐿ.	ᑀ.	ᑁ.	ᑂ.	ᑃ.	ᑄ.	ᑅ.
ᑇ.	ᑈ.	ᑉ.	ᑊ.	ᑋ.	ᑌ.	ᑍ.	ᑎ.	ᑏ.	ᑐ.
ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.	ᑙ.	ᑚ.	ᑛ.	ᑜ.
ᑟ.	ᑐ.	ᑑ.	ᑒ.	ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.
ᑛ.	ᑞ.	ᑟ.	ᑠ.	ᑡ.	ᑢ.	ᑣ.	ᑤ.	ᑥ.	ᑦ.
ᑩ.	ᑪ.	ᑫ.	ᑬ.	ᑭ.	ᑮ.	ᑯ.	ᑰ.	ᑱ.	ᑲ.
ᑴ.	ᑵ.	ᑶ.	ᑷ.	ᑸ.	ᑹ.	ᑺ.	ᑻ.	ᑼ.	ᑽ.
ᑿ.	ᑾ.	ᑿ.	᐀.	ᐁ.	ᐂ.	ᐃ.	ᐄ.	ᐅ.	ᐆ.
ᐇ.	ᐈ.	ᐉ.	ᐊ.	ᐋ.	ᐌ.	ᐍ.	ᐎ.	ᐏ.	ᐐ.
ᐑ.	ᐒ.	ᐓ.	ᐔ.	ᐕ.	ᐖ.	ᐗ.	ᐘ.	ᐙ.	ᐚ.
ᐛ.	ᐜ.	ᐝ.	ᐞ.	ᐟ.	ᐠ.	ᐡ.	ᐢ.	ᐣ.	ᐤ.
ᐦ.	ᐧ.	ᐨ.	ᐩ.	ᐪ.	ᐫ.	ᐬ.	ᐭ.	ᐮ.	ᐯ.
ᐱ.	ᐲ.	ᐳ.	ᐴ.	ᐵ.	ᐶ.	ᐷ.	ᐸ.	ᐹ.	ᐺ.
ᐼ.	ᐽ.	ᐾ.	ᐿ.	ᑀ.	ᑁ.	ᑂ.	ᑃ.	ᑄ.	ᑅ.
ᑇ.	ᑈ.	ᑉ.	ᑊ.	ᑋ.	ᑌ.	ᑍ.	ᑎ.	ᑏ.	ᑐ.
ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.	ᑙ.	ᑚ.	ᑛ.	ᑜ.
ᑟ.	ᑐ.	ᑑ.	ᑒ.	ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.
ᑛ.	ᑞ.	ᑟ.	ᑠ.	ᑡ.	ᑢ.	ᑣ.	ᑤ.	ᑥ.	ᑦ.
ᑩ.	ᑪ.	ᑫ.	ᑬ.	ᑭ.	ᑮ.	ᑯ.	ᑰ.	ᑱ.	ᑲ.
ᑴ.	ᑵ.	ᑶ.	ᑷ.	ᑸ.	ᑹ.	ᑺ.	ᑻ.	ᑼ.	ᑽ.
ᑿ.	ᑾ.	ᑿ.	᐀.	ᐁ.	ᐂ.	ᐃ.	ᐄ.	ᐅ.	ᐆ.
ᐇ.	ᐈ.	ᐉ.	ᐊ.	ᐋ.	ᐌ.	ᐍ.	ᐎ.	ᐏ.	ᐐ.
ᐑ.	ᐒ.	ᐓ.	ᐔ.	ᐕ.	ᐖ.	ᐗ.	ᐘ.	ᐙ.	ᐚ.
ᐛ.	ᐜ.	ᐝ.	ᐞ.	ᐟ.	ᐠ.	ᐡ.	ᐢ.	ᐣ.	ᐤ.
ᐦ.	ᐧ.	ᐨ.	ᐩ.	ᐪ.	ᐫ.	ᐬ.	ᐭ.	ᐮ.	ᐯ.
ᐱ.	ᐲ.	ᐳ.	ᐴ.	ᐵ.	ᐶ.	ᐷ.	ᐸ.	ᐹ.	ᐺ.
ᐼ.	ᐽ.	ᐾ.	ᐿ.	ᑀ.	ᑁ.	ᑂ.	ᑃ.	ᑄ.	ᑅ.
ᑇ.	ᑈ.	ᑉ.	ᑊ.	ᑋ.	ᑌ.	ᑍ.	ᑎ.	ᑏ.	ᑐ.
ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.	ᑙ.	ᑚ.	ᑛ.	ᑜ.
ᑟ.	ᑐ.	ᑑ.	ᑒ.	ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.
ᑛ.	ᑞ.	ᑟ.	ᑠ.	ᑡ.	ᑢ.	ᑣ.	ᑤ.	ᑥ.	ᑦ.
ᑩ.	ᑪ.	ᑫ.	ᑬ.	ᑭ.	ᑮ.	ᑯ.	ᑰ.	ᑱ.	ᑲ.
ᑴ.	ᑵ.	ᑶ.	ᑷ.	ᑸ.	ᑹ.	ᑺ.	ᑻ.	ᑼ.	ᑽ.
ᑿ.	ᑾ.	ᑿ.	᐀.	ᐁ.	ᐂ.	ᐃ.	ᐄ.	ᐅ.	ᐆ.
ᐇ.	ᐈ.	ᐉ.	ᐊ.	ᐋ.	ᐌ.	ᐍ.	ᐎ.	ᐏ.	ᐐ.
ᐑ.	ᐒ.	ᐓ.	ᐔ.	ᐕ.	ᐖ.	ᐗ.	ᐘ.	ᐙ.	ᐚ.
ᐛ.	ᐜ.	ᐝ.	ᐞ.	ᐟ.	ᐠ.	ᐡ.	ᐢ.	ᐣ.	ᐤ.
ᐦ.	ᐧ.	ᐨ.	ᐩ.	ᐪ.	ᐫ.	ᐬ.	ᐭ.	ᐮ.	ᐯ.
ᐱ.	ᐲ.	ᐳ.	ᐴ.	ᐵ.	ᐶ.	ᐷ.	ᐸ.	ᐹ.	ᐺ.
ᐼ.	ᐽ.	ᐾ.	ᐿ.	ᑀ.	ᑁ.	ᑂ.	ᑃ.	ᑄ.	ᑅ.
ᑇ.	ᑈ.	ᑉ.	ᑊ.	ᑋ.	ᑌ.	ᑍ.	ᑎ.	ᑏ.	ᑐ.
ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.	ᑙ.	ᑚ.	ᑛ.	ᑜ.
ᑟ.	ᑐ.	ᑑ.	ᑒ.	ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.
ᑛ.	ᑞ.	ᑟ.	ᑠ.	ᑡ.	ᑢ.	ᑣ.	ᑤ.	ᑥ.	ᑦ.
ᑩ.	ᑪ.	ᑫ.	ᑬ.	ᑭ.	ᑮ.	ᑯ.	ᑰ.	ᑱ.	ᑲ.
ᑴ.	ᑵ.	ᑶ.	ᑷ.	ᑸ.	ᑹ.	ᑺ.	ᑻ.	ᑼ.	ᑽ.
ᑿ.	ᑾ.	ᑿ.	᐀.	ᐁ.	ᐂ.	ᐃ.	ᐄ.	ᐅ.	ᐆ.
ᐇ.	ᐈ.	ᐉ.	ᐊ.	ᐋ.	ᐌ.	ᐍ.	ᐎ.	ᐏ.	ᐐ.
ᐑ.	ᐒ.	ᐓ.	ᐔ.	ᐕ.	ᐖ.	ᐗ.	ᐘ.	ᐙ.	ᐚ.
ᐛ.	ᐜ.	ᐝ.	ᐞ.	ᐟ.	ᐠ.	ᐡ.	ᐢ.	ᐣ.	ᐤ.
ᐦ.	ᐧ.	ᐨ.	ᐩ.	ᐪ.	ᐫ.	ᐬ.	ᐭ.	ᐮ.	ᐯ.
ᐱ.	ᐲ.	ᐳ.	ᐴ.	ᐵ.	ᐶ.	ᐷ.	ᐸ.	ᐹ.	ᐺ.
ᐼ.	ᐽ.	ᐾ.	ᐿ.	ᑀ.	ᑁ.	ᑂ.	ᑃ.	ᑄ.	ᑅ.
ᑇ.	ᑈ.	ᑉ.	ᑊ.	ᑋ.	ᑌ.	ᑍ.	ᑎ.	ᑏ.	ᑐ.
ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.	ᑙ.	ᑚ.	ᑛ.	ᑜ.
ᑟ.	ᑐ.	ᑑ.	ᑒ.	ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.
ᑛ.	ᑞ.	ᑟ.	ᑠ.	ᑡ.	ᑢ.	ᑣ.	ᑤ.	ᑥ.	ᑦ.
ᑩ.	ᑪ.	ᑫ.	ᑬ.	ᑭ.	ᑮ.	ᑯ.	ᑰ.	ᑱ.	ᑲ.
ᑴ.	ᑵ.	ᑶ.	ᑷ.	ᑸ.	ᑹ.	ᑺ.	ᑻ.	ᑼ.	ᑽ.
ᑿ.	ᑾ.	ᑿ.	᐀.	ᐁ.	ᐂ.	ᐃ.	ᐄ.	ᐅ.	ᐆ.
ᐇ.	ᐈ.	ᐉ.	ᐊ.	ᐋ.	ᐌ.	ᐍ.	ᐎ.	ᐏ.	ᐐ.
ᐑ.	ᐒ.	ᐓ.	ᐔ.	ᐕ.	ᐖ.	ᐗ.	ᐘ.	ᐙ.	ᐚ.
ᐛ.	ᐜ.	ᐝ.	ᐞ.	ᐟ.	ᐠ.	ᐡ.	ᐢ.	ᐣ.	ᐤ.
ᐦ.	ᐧ.	ᐨ.	ᐩ.	ᐪ.	ᐫ.	ᐬ.	ᐭ.	ᐮ.	ᐯ.
ᐱ.	ᐲ.	ᐳ.	ᐴ.	ᐵ.	ᐶ.	ᐷ.	ᐸ.	ᐹ.	ᐺ.
ᐼ.	ᐽ.	ᐾ.	ᐿ.	ᑀ.	ᑁ.	ᑂ.	ᑃ.	ᑄ.	ᑅ.
ᑇ.	ᑈ.	ᑉ.	ᑊ.	ᑋ.	ᑌ.	ᑍ.	ᑎ.	ᑏ.	ᑐ.
ᑓ.	ᑔ.	ᑕ.	ᑖ.	ᑗ.	ᑘ.	ᑙ.	ᑚ.	ᑛ.	ᑜ.



*Le Ministre de la Défense*

042914

COPIE POUR INFORMATION



# HERR NUL HAG AN ARME

Charles HERNU

**1** Un tamm deus lizher Herr Nul da Le Douarin, prezidant ar Celib

**2** Pennad 24-d danvez-lezenn Ar Peñsek, sinet gant Herr Nul.

PETRA LAROUT OUZHPENN ?

16

**1** Par lettre du 5 août, vous avez appelé mon attention sur la situation de MM. KERRAIN et CORBEL.

Ces jeunes gens ont refusé lors de leur incorporation de revêtir l'uniforme au motif qu'ils étaient autonomistes bretons et refusaient de servir dans l'Armée Française.

Après le premier refus d'obéissance, ils ont été amnistiés, mais à leur retour en France, ils ont récidivé en faisant valoir le même motif.

Il ne s'agit pas d'objecteurs de conscience. Ils n'ont jamais manifesté l'intention d'obtenir le statut.

Il est exact que la peine prononcée par le T.P.F.A. de Rennes semble assez sévère par référence à celles qui sont infligées pour refus d'obéissance. Toutefois, cette sévérité paraît avoir été motivée par le refus des intéressés de s'exprimer en français à l'audience.

**2**

Document  
diffusé le  
16 avril 1981 (4)

N° 2269

## ASSEMBLÉE NATIONALE PROPOSITION DE LOI

*relative à la place des langues et cultures des peuples de France dans l'enseignement, dans l'éducation permanente, dans les activités culturelles, de jeunesse et de loisir, dans les émissions de la radio et de la télévision et dans la vie publique.*

PRÉSENTÉE

PAR MM. LOUIS LE PENSEC, CHRISTIAN LAURISSERGUES, MAURICE ANDRIEU, JEAN AUROUX, Mme EDWIGE AVICE, MM. GÉRARD BAPT, GUY BECHE, LOUIS BESSON, ANDRÉ DELEHEDDE, CLAUDE EVIN, GEORGES FILLILOUD, JOSEPH FRANCESCHI, PIERRE FORGUES, PIERRE GARMENDIA, JACQUES-ANTOINE GAU, CHARLES HERNU, GÉRARD HOUTEER, Mme MARIE JACQ, MM. PIERRE JAGORET, RAYMOND-GEORGES

24-d) Les services de police et les tribunaux doivent faire droit à tout citoyen demandant à être entendu dans la langue de sa Région, qu'il s'agisse d'un accusé ou d'un témoin. Conformément aux prescriptions des conventions internationales, l'autorité judiciaire attache la plus grande attention à ce qu'il soit tenu compte du droit de tout justiciable d'être informé et interrogé dans la langue de sa Région, si besoin est, par l'intermédiaire d'un interprète. De même, tout témoin peut dans les mêmes conditions être entendu dans la langue de sa Région.

17

# Radio Toull an dar...



CHEVEYE!! POLOGED DISOURS!  
AMAN FANCH AR PEUL  
WAR RADIO TOULL AN DAR!  
SALUT LES MICHTONS  
C'EST RITON! HELLO  
HAPPY TAX  
PAYERS!!

MEMES AR RE  
VOUZAR A SELAOU  
RADIO TOULL AN  
DAR!!!

WAS?



HA GANEOMP ER  
STUDIO AN AOTROU  
DONALD DUCK!!!  
GWAK! GWAK!  
DEBONDOUR DEOCH  
SELAOUER!! GAER



GOJE!  
GOURD  
PA ABADENN 'ZO PUNK  
A-GRENN! PEBEZH TROTAT!!  
PEBEZH KAOCHAT!!

DEZ!  
FREOUZ!



MONT A REAS FANCH AR  
PEUL EN UN OBTALERI  
DA BREDERIAN ...

PETRA AN DIAOUL  
A C'HELLEN ME OBER  
EVIT LAKRAT BUHEZ  
EN ABADENN!!?...



STUDIER AMERIKAN WAR  
AN TUNODO, NEKETA?



HA BREMAN, UN  
DIVINADELL: PETRA  
VE' UN ESTON?  
PELLGOMZIT KEKENT  
74.74. BECH DE'!

YA! MEZ PAZ FORZH  
PESEURT HINI!! HINI  
AR BOBL!! AN TUNODO  
HELENNET ER SKOL  
VVOUCH NEO KET  
TUNODO... MEUS  
KEN MET TUNODO  
AR RE GOZH A  
VA MAT ...



OUAOU!!  
KAVET 'M EUS!!  
TRI MIL C'HAST!!  
RADIO BOUDEDEO!  
HAN DA INTERVEVIN  
AN DUD ER STRAED  
SETU UN NEVEZINT!



HOP!  
Hop!  
Hop!  
ITRON! ITRON!  
MAR LIJ! AMAN  
RADIO TOULL AN  
DAR!!.....



'MEUS AN N'EUS MUI  
PIKOL TUD O PREG TUNODO,  
EO?



HA! HA! UR SELAOUER O  
TELEFONNI! ALO! OUVI!  
BONJOUR! L'EMISSION VOUS  
PLAIT?.. NON... PENAS?  
RESPONT D'AN DIVINADELL:  
"PETRA VE' UN ESTON?  
UR BERN KAOCH  
KEIT HAG UR  
PIGNON! YA  
GOUNE'ET PEUS  
UN DIKS!!



PESEURT DISK?... ELIAN PRONOST  
LIVE AT "PLOUNEUR MENEZ GARDEN"  
PENAS?... D'IPITET OCH!!  
ENCORE UN  
AUDITEUR QUI  
AURA TROUVE  
SON BONHEUR!!  
ON SE MARRE  
SUR RADIO TOULL  
AN DAR!!



HOP!  
UN  
DISK!  
TRUGARE DEOCH  
AOTROU "D.D." MET  
ARADAT EO TRUB-  
VILHAN PELLOCH HIR  
SELAOUEREN, DREIST  
HOLL E BREZHONEG!!




GWELET PEUS AN ABADENN  
"DAOULAS" WAR AOTENN 2, DECH D'AN  
NOZ?...YA... KONTIT DIN UN TAMM!!

EN  
BRETON?



JEAN RANOU, "J.R." KOA,  
EN DEUS GWERZHET  
TOUT AR BRIKOL HEP  
LARET SEURT D'AR  
C'HOPERATIV!! E WREG  
MARI PENN AN ECH 'OA  
KET  
KONTANT, ME  
LAR DECH!!

UR VEZH!



# DIVIZ

JOB JAFFRE ? N'anavit ket moarvat; un den didrouz eo ivez, un den a zalc'h neoazh da sach ar e bluenn, bep gwener, evit kas ur pennad e brezhoneg d'ur gazetenn anavet mat en hor c'hornad : "La Liberté du Morbihan" vez graet anezhi.

Get e-leizh 'vez lennet pennadoù Job JAFFRE, kozh ha yaouank, muioc'h ag ar re gentañ marse met pe vern, lennet 'vezont get an "dud" a zre-mañ, Bamet on bet meur a wezh e kavout ag e lennerion lec'h ne vehe ket kredet.

A-c'houde un nebeut blezadoù e tastuman e bennadoù a vez serret pe-vezh genin en ur c'haiez bras goude bout bet lennet pizh. E-leizh a draoù am eus desket else, muioc'h, krepabl bras, evit na zesko biken lennerion "kentelioù brezhoneg" Ouest-France mah eus anezhe.

Ha setu daet c'hoant din da vont d'her gwelet hag erru e ti ar c'henderz "mabedad", (else 'vez sinet e bennadoù), ag ar choaz on bet degemeret hag e vezan bepred; daou vlez 'zo tuchant e tarem-predan e di hag e teskan traoù getof; un den hegompapl ep ha bourrapl e ziviz.

Ne vez ket berr gwezh ebet, evit laret mat n'eo ket souezh : get kement en deus bevet e c'hellehe pa garehe sevel ur mell levz a vehe marse diaes da zi-bradiñ.

Bout eo bet, hed e amzer, ec'h ober ar dro un dra bennak, daet eo bremañ e goulz da ziskuilh met ne c'houlenn ket lezel e bluenn da bouez. Soubet barzh ar mel evit kas pour da lod pe Tlemm evit boutiñ o fegement get lod arall, farsus, goapaüs pe melkonius e ta honnezh bep sizhun, da zuff e dammigoù paper.

Anavet en deus Job JAFFRE un amzer a zo tremenet ha tud aet azoc'htomp, bout eo bet penn skrivagnour an "Heure Bretonne" pad ar brezel, pezh a zo kaoz dehoñ bout lakaet en toull get Roparz HEMON, mignon bras da Youenn DREZEN e-pad prantad duañ e vuhez pa n'oa ket hennezh ur roched ar e anv ... ha c'hoazh a zo ...

Meur a bennad 'on e zoñj ober diar e benn, en hani kentañ e vo kaozeet ag e vuhez, dre vras, ha distroet, er pennadoù da c'heul ar draoù tesusoc'h.

"Eñvorennoù a-walc'h" a c'hell soñjal lod; n'eo ket ul levz a gennigan sevel gete nemet klask kompren un den hag evit kement-se int talvoudus.

JOB JAFFRE - 'Ba Marepil on ganet, ar zouar parrez Berne, ar vord lenn ar Pontkalleg, a-rez get ar maner; ar maner a zo d'un tu ha Marepil doc'h an tu 'rall. Ganet on barzh ur c'hraou, en un tammig penn-ti mar karit, d'ar 6 a viz Mae, er blez c'hwec'h (1906). Ma zad oa devezhour ha mamm ivez.

Ne oamp ket chomet forzh pell ba' Marepil eizh miz 'oan pa oamp daet da chom da Gernasen. Merchet on, ur seurt, ar baperioù parrez Berne.

Arlerc'h emañ aet ma zad da glask e damm boued da gostez Pariz, mod-se emañ bet betek ar brezel-bed kentañ. Eñv aet d'ar brezel ha daet en-dro, divac'hagn. Dijablet oa bet ag an dañjer dre m'en doa bet 5 a vugale, laosket veze da zont d'o gwelet hag else, 'veze bepred unan arall doc'h hen gortoz ... 8 omp bet else, me 'an hani koshañ.

Goude ar brezel hor boa kavet un tammig tachenn e Pempoull, e-tal Kernasen, ar hent an Ignel, an "ti-plouz" m'eus kaozeet anehoñ an deiz arall "an ti plouz, an dour hag an tan" - La Liberté - 8/10/82.

An amzer vil a zo er mare-mañ a zegas soñj din e seblante an ti bout hejet get an avel, diharak a zae a du ar Pontkalleg ken ne lare unan a mam breuder vihan : "an ti-mañ, marse, nen deo ket plantet mat!"

"etrezomb e brezhoneg" 8/10/82

Gober a rae ma zad ar dro an dachenn, ne oa ket forzh a dachenn hag e kave c'hoazh an tu da vont da sikour get peizanted an dro, lies a-walc'h 'yae da Vanepil ha me 'yae ivez, el rac'h ar vugale d'an amzer-se; serroñ piz pe avaloù-douar, d'ober un tamm sikour, da endrann ...

'Oan ket 6 vlez c'hoazh pa oan bet er skol evit ar wezh kentañ, ba' skol Kernasen. Me oa ur c'hrouadur a zeske mat : ma zri sertifikat am eus bet, tri a veze : unan "ofisiel", unan "lik" hag unan arall c'hoazh evit ar relijion.

Neuze 'on digouezhet get ur beleg kozh a oa e anv "Beleg" just a-walc'h hag en deus ma sikouret evit mont d'ar skol da Redon, ba' Sant Salver. Daouzek vlez oan neuze. Gouezet a-walc'h a raen penaos e vehe bet klasket ma lakaat da vout beleg, n'eus ket bet graet kement-se bec'h arn'n met me' sante ha kentoc'h evit bout dle dezhe me zo bet gwell din chomet er gêr. N'em eus ket bet na bacho, na diplom na netra ; else emañ bet a-hed ma amzer.

AL LANV - Ha penaos oc'h daet da vout kazetennour ?

Da gentañ on bet barzh ar skol betek 16 pe 17 vlez, da c'hortoz mont d'ober ma amzer-servij on bet mestr-skol, laosket 'veze an dud ; "mestr-skoazeller" nar faot deoc'h. Kement-se n'eus padet betek ma ugent vlez.

E-pad ma oan ec'h ober skol du-se em boa en em lakaet da zastum e-leizh a draoù, sorc'hennou, gwerzennoù, kanennoù, savet m'oa ur skipailh mell-droad, graet kermesoù, c'hoariva, bepred 'veze ba' traoù seurt-se. Ma amzer bourraplañ eo bet an amzer-se, ha ma amzer paourañ ivez.

D'ar prantad-se ivez m'eus kaset ma fa- periou kentañ da Loeiz HERRIEU a oa da benn a "ZIHUNAMB". Me a sine "Ar FLADUITOUR" .... hag ar fleütour-se en em lakae da fleütat diàr benn "D Breizh ma bro", àr an ton bras, barzhonegoù, else 'vezer pa veze yaouank.

Ha Loeiz HERRIEU, ur wezh, da laret din : "Met ne vehec'h ket c'hoazh evit skriv e yezh plaen ?". Un tammig oan bet faenet ha neuze am boa cheffchet anv "Stevan ar ROHALLEG", ne veze ket gouezet piv oa.

E-pad ma servij ne oan ket bet forzh sou- dard peogwir oan 'ober àr dro ar re glañv ha goude oan bet lakaet d'ober skol d'ar Valgached.

Ar-lerc'h ma servij oan aet da Bariz, an dra-se oa er ble 1927, ur voereb din a oa du-se hag hi doa kavet ul lec'h din da labourat e ti un "agent de change", 2

vlez oan bet du-se, ba' paperioù noter, amzer a-walc'h din da zeskiñ un tammig lezennoù ar gwir. Met ne oan ket chomet pell atav. 5 pe 6 sizhun en un ti-dilhad d'ober àr dro teuliadoù an dud a baec dre vizvezh.

Ar-lerc'h oan bet un herrad e ti-Sitroen aliet get ur c'henseurt din, ur C'horsad, diharak da welet met den a galon. Un daou vlez bennak 'oan chomet, e soursial ag ar paeoù, merkiñ ar labour a veze graet bemdez hag all ....

A-benn ar fin, e miz Meurzh 1931, am boa kaset ur lizher d'an "Nouvelliste du Morbihan" a oa da benn anehoñ mab un amiral ; Pier ar BRIS. Plijet en doa ma lizher dehoñ. Respontet n'oa din doc'htu "ha kontant vehec'h da vout kazetennour ?"

1.250 lur a gennige din met gwell e oa din gounid 1.250 lur ba' an'Oriant evit 1.800 e Pariz. Kroget m'oa barzh ma labour d'an 13 a viz Ebrel 1931, deiz Pardon paskoù.

An Oriant, d'an amzer-se, a oa ur gêr bourrapl. Dont a rae tud d'ar pardon get an tren bihan, etre Melann hag an Oriant, leun-barr a dud en em genderve ag an eil bagon d'ar gile. Me 'm'eus en em gavet get tud vat barzh an tamm tren-se ; a-raok erru en Oriant e oamp kar, bepred e anavemp unan bennak a oa kenderv d'ar geniterv-mañ .... Kavet 'm eus ur feson da vevañ na vez ket kavet ken. An dud 'zo kentoc'h, 'laran ket bleidi, met doujañs o dez an eil doc'h ar gile.

Else m'oa kroget barzh ma labour hag on chomet barzh ar memes ti da c'houde, pa deo daet an "Nouvelliste" da vout ar "Liberté".

AL LANV - Neuze oac'h kazetennour, e galleg pe e brezhoneg ?

Kazetennour e galleg oan, lakaat a raen tammoù brezhoneg, a-viskoazh m'eus bet laket begadigoù met pas evit gober penn- adoù e ma ran bremañ barzh ar "Liberté" gras da Vaurice CHENAILLER a oa penn renour hag en doa goulennet genin gober.

Kroget m'oa get R. TALDIR ha "bleu benal" Pier ar SAOZ e Gernasen, a oa mestr-skol e Pleskob ; hennezh a skrive brezhoneg yac'h, dalc'het en deus 'gozik betek e varv.

AL LANV - Petra oa en ho soñj pa p'oa kroget geti ?

Me n'em gav kazetennour a vicher, a galon hag a-viskoazh ha kazetennour e brezhoneg ivez, me zo bet ret din kavout ma zamm boued ha seul gwezh ma m'eus kavet an tu d'ober get ar brezhoneg am eus graet hag e talc'han, a c'houde 20 vlez zo.

1 - Me glev' kornal  
Ur gwall avel  
En nozioù dall.  
Ar gwez vransell ;  
An derv kalet  
A zalc'h bepred

2 - Eñ gas safar  
Hag a vregon  
'Klask o diskar.  
Met o c'halon  
A zo kalet  
Ha ne gren ket.

3 - Doc'h pep avel  
Doc'h pep amzer  
Breizh da zerc'hel  
'Deus bet d'ober.  
Emañ atav  
Kreñv en he sav.

4 - Couarnomp hor bro  
Azoc'h ar fall  
Ma tay endro  
El gwezharall  
Bro an dud reizh  
Hep gev na mezh.

5 - Sevel a ray  
Bro hon tadoù  
Hag e paday !  
Rak he maboù  
El derv kalet  
Ne blegint ket.



1917. Job Jaffré e Kernasen, deiz e bask kentañ

(Tennet a "ZIHUNAMB" Niverenn 164 - miz C'hwevrer 1925)

### KEVIN TRUDU, emsaver



## AR RE-SE A VEZ O REN WAR AR BED...




## LABOUSED

AR C'HEFELEG-AOD (Numenius arquata)

Emaomp oc'h echuiñ gant un valeadenn hir war vord an Elorn. Emañ ar mor o sevel hag e santer avel ar reter o krefavaat hag oc'h en em silañ er ganienn e-giz e gouzoug ur voutailh davet Laderne. Teir gloc'h a zifoup kuit hogos dindan hor fri. Hon treid sanket en dour chag hag er fank e chomomp a-sav da selaou klemmichadenn ar c'hefeleg-aod. Ur seurt galv eo ...., tlou-i, tlou-i ! D'am zro e trevezan e c'harmadenn hag e teu davedon. Re bell eo c'hoazh evit ma c'hellfen gwelet e bigos kromm, met e zoare sioul ha realiek da nijal a anavezan mat. Atav em eus santet un trivili em c'hreiz o klevet al labous-se o c'hervel e genseur-ted. Galv ul labous kollet e-unan-penn er geunioù. Derc'hel a reomp gant hon hent hag e rankomp kemer ode an tourterien. Ur bagad binoterien (1) ha pennduiget all a glevomp o varvailhat er gwez kraoñ-kevez. Un tad moualc'h a skarz h kuit a-dizh dirazomp gant ur youc'hadenn skilt. Derc'hel a reomp gant an ode hag a-dreñv ur parkad maiz e welomp seizh kefeleg-aod e-touez ur bodad gwehani trouzus. Derc'hel a reont da bigosat an douar blot nevez aret.

A bep eil e savont o fennoù da sellet. N'eo ket dav tostaat muioc'h rak kuit ez aint buan. Morse n'em eus bet tro da gavout neizh ar c'hefeleg-aod ha koulskoude ez eus war a lavarar un 300 koublad bennak o neizhañ e Breizh. Se n'eo ket kalz hag emañ o niver o vont war zigreskiñ tamm ha tamm. Abegoù resis a zo : An tantadoù niverus e doug an haf e taouac'hegi ar menezioù Arre, ar c'hiz da hadañ gwez pin e pep lec'h, mardreg al lanneier ha ne vez mui graet hag ivez niver an douristed o kreskiñ bep bloaz en-dro d'ar Menez C'homm. Bod a gave ar c'hefeleg-aod evit neizhañ e-kreiz Breizh, bremañ avat e rank mont pelloc'h. Galv un harluad a glever peurvuiañ e-doug miz Gwengolo.

TUDU



Anvioù all :

- Ar c'hefeleg-mor
- Ar paotr-saout (Rostren)
- Ar c'hellog
- Ar c'houlc'hi (Skaer)

(1) Binoter = mésange à longue queue (Aegithalos caudatus)

### AL LIAMM

AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM  
AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM  
AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM  
AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM AL LIAMM

LEVRIOU NEVEZ DEUT ER-MAEZ:  
KENAN KONGAR BARZHONEGOU 30 LUR  
MAOZ GLANDOUR IZAIA 34 LUR  
R. AR C'HALAN LEVR AR BLANEDENN 29 L  
A. DUVAL TRACON AN DOUR 36 LUR

AL LIAMM, 47 str. NOTRE-DAME,  
22200 GWENGAMP. CCP 1136 82 ROAZHON

AR STROLLADOÙ POLITIKEL  
HIZIV : S. P. V.



UR WEC'H ALL : EMOGANN (MARTeze)

# O VALE

## .TAN AZ PEFE ?

Plijus a kavan bale, war va fovezig dre maeziou ha koadeder Bro-Dreger. Dreist-holl e dibenn an hafv p'eo sioul-kaer an aer ha dibreder ar spered. "Treged, perlezenn Breizh-Izel, eme Anjela Duval. Gwirañ tra !

Just a-walc'h, edon war ribl al Leger, ne pell eus Traoù an Dour, lakaet ganin em fenn dizoloif togoù-touseg, stank er c'horn duius-se.

Hanter leuniet ganin ar bisac'h a vez atav a-istribilh eus ma skoaz gant pikolioù kabelloù, ez is d'ober un tamm diskuizh war ur mell roc'h sanket don e briell ar rinier. Tapout a ris ur sigaretenn. Siwazh din. Disofjet em boa ma alumetez. Ha n'eo ket ar paourkaezh pesked ampouezet gant Tilly a rofe tan din.

E oan oc'h arvestif red an dour o kas da bell moc'haj penn-bras Gwerleskin pa glevis trouz paziou unan bennak war delioù sec'h ar goaleg tro-kein din.

Un den, yaouank c'hoazh, a gerzhe sioulik, ur penn-bazh gantañ. Tostaat a rae. Reif a ris davetañ :

- E rav an amzer, 'keta ?
- ....
- Tan az pefe ? emezon en ur ziskouez dezhañ ma sigaretenn didan.
- ....

Sabatuet mik ar paotr ! Chom a reas ur pennadig difiav-tout, daoulagad dis-pourbellet dezhañ. Hag a daol trum e tec'h as kuit d'ar red ! Steuziañ a reas buan e donder ar c'hoad.

Piv an diaoul eo an istrogell-se ? emezon. N'eus ket tud gouez o vevañ ken er c'hoadoù ! Ne oa ket tres ur c'houer dezhañ, kentoc'h hini un den eus kêr deuet d'aveliñ e benn.

Spouronet e vefe bet o klevout ac'hanon mont dezhañ e brezhoneg ? Ba ! ne oan ket o vont da valañ soñjoù a bep seurt diwar emzalc'h ar gejadenn-se.

Distreñf a ris d'ar gêr hag ober ur c'hofad kebell-touseg.

Un toullad devezhioù diwezhatoc'h e voe d'am zro-me chom sabatuet o welout skeudenn an den am boa kejet outañ war ribl al Leger war bajenn gantañ ar gelaouenn. "Adkavet eo bet Virgil Tanase. Kuzhet e oa war ar maez en ul lec'h bennak e Breizh".

Eñ an hini a oa neuze ! Biskoazh kemend-all ! Met un dra avat na gompren ket : perak 'ta e oa tec'het kuit evel m'en doa graet ? N'en doa tamm aon ebet da gaut em c'hefver. Ma ! Tra da gompren !

Kemer a ris ur sigaretenn. Kaoc'h ! Pelec'h ar foeltr emañ ma alumetez ?

- Ho ! Hona, Tan az pefe ?

Erwan KERVELLA

**BREMAN**  
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN  
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN  
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN  
BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN BREMAN  
KAZETENN AR STOURMOU E BREIZH. BEP  
DAOU VIZ E TEU ER-MAEZ KELEIER AES  
HA BEV DIWAR-BENN BUHEZ AR VRO.  
KOUMANANT : 50 LUR. 8 STRAED HOEHE  
35 000 ROAZHON. (SKOL AN EMSAV)

**Ar bed Keltiek**  
LEVRIOU  
FLADENNIOU  
2, STRAED AR ROUE GRALON  
KEMPER - PG/95-42-82  
RENER : GWELET AR PUR

# SILOU!

E-pad un abadenn skingomz nebeudig'zo 'z eus bet kinniget gant P. JUQUIN, unan eus pennoù-bras ar strollad komunour, chom didrouz e-pad ur vunutenn e koun "an holl re vev ha re varv er Reter Nesañ". Dibace miz Mae 1968, ( ne blij ket dezhañ vefe lavaret seurt tra) eo bet lesanvet "cours, cours, petit lapin" pa oa bet ret dezhañ skarzhañ ha redek kuit dre ur prenestr er skol-veur (rener ar studieren gomunour 'oa d'ar poent-se) dre ma oa darn vrasañ eus ar studieren all a felle dezho ober dezhañ e stal. Met sed aze ur menoz eus ar re wellañ bet kinniget deomp abaoe un nebeut bloavezhioù a gav din. Dispar-kenañ ha da vezañ brudet ha skignet dre ar bed holl, e pep skinwel, e pep skin-gonz, e kement gazetenn 'vefe, e kement boçadeg 'vefe, harr-ha-berr e pep lec'h. Bep munutenn ur vunutenn didrouz, bep linenn ul linenn "diskrid".

Memestra e kavan souezhus e vije bet kinniget gant "petit lapin" ur vunutenn evit ar Reter Nesañ. Dereat-tre 'oa eveljust, kaer zoken. Met neuze ken dereat all vije bet dezhañ kinnig ur vunutenn evit Bro-Bologn, ur vunutenn evit Bro-Gambodj, ur vunutenn evit Bro Viet - Nam, ur vunutenn evit Bro-Hungaria (56), ur vunutenn evit Bro Csekoslovakia (68), ur vunutenn evit Bro Dibet hag an Dalaf Lama, ur vunutenn evit Lech Walesa, ur vunutenn evit Bro Iwerzhon, ur vunutenn evit ar Gurded, ur vunutenn evit an Armenianed, ur vunutenn evit Bro Salvador, ur vunutenn evit ... (Tavit El Kabac'h!), ur vunutenn evit Bro Rhodezia, ur vunutenn evit ar C'hapes brezhonek (A nann 'vat !), ur vunutenn evit Bro Arc'hantina, ur vunutenn evit Bro Chili, ur vunutenn evit Allende, div vunutenn evit yec'hed Brejnev ha Marchais, ur vunutenn evit ma c'houezfe ar skipailh basket soviedour a-enep skipailh ping-pong ar Stadoù-Unanet a-enep skipailh proletour volley-ball soviedel, ur vunutenn evit ... "Digarezit Ao. JUQUIN ..." "Laret 'm eus ur vunutenn evit ..." Met, met, echu eo an abadenn Ao. JUQUIN" Nag un abadenn ! Nag a blijadur ! ... Didrouz .. ha didrouz c'hoazh ....

Ijinit neuze, ijinit e-pad ur vunutenn didrouz (hepken), ar plac'h Okrant war an eil chadenn skinwel o tont war wel goude ar bruderezh ken speredek hag o kinnig deoc'h ugent munutenn didrouz e koun hon Doue a-vremañ Koka-Kola ha dek munutenn all evit ma vefe brav an amzer an deiz goude, pe Mourouzi war ar chadenn gentañ o kinnig ugent munutenn didrouz evit ma vefe brav an amzer warc'hoazh ha dek munutenn evit hor rouanez "Grace" (Doue ha Langlois he fardono)


Ijinit neuze, ijinit e-pad ur vunutenn didrouz (eveljust !) Fañch Mit. e-pad ur brezegenn a-zoare o kinnig ur vunutenn evit Bro Bologn. Ech u ganti.

"Ha bremañ a-raok pennañ gant an abadenn ur vunutenn evit Bro Salvador", hag all, hag all ...

Ijinit Chirac o kinnig ur vunutenn evit ma chomfe maer Pariz, ur vunutenn all evit m'en dije Giscard un taol-balon eus ar re washañ ha dibardon, unan evit ma c'houezfe el loto, hag all, hag all...

A pebezh levezne ! Klevit neuze trouz heson ha mekonius didrouz ar bed. O ! Trugarez deoc'h "Petit lapin" ! Trugarez bras deoc'h ! Ra skianto bremañ didrouz eñus ar bed o 'n em lazhañ, o 'n em zrailhañ a greiz bouzelioù dindan lagad tener ha dous an Ao. Kalachnikov ha SAM. SAM, S.S. 20 ha Stein. Ra vezo toullgofet ar vevelien, ra vezo trubardet ar pebloù bihan ha mouget o yezhoù, "Petit lapin" a ginnigo deoc'h ur vunutenn... Marteze ....

Herle Denez



# LEVRIOU

SÉAN Ó CONAILL'S BOOK

Istorioù ha kontadennoù deus Iweragh. Dastumet gant Séamus Ó Duilearga ha lakaet e saozneg gant Maire MacNeill. Embannet gant Comhairle Bhéaloideas Éirann, Baile Atha Cliath. Priz = 14 L.

Embannet evit ar wech kentañ e 1948 en iwerzhoneg, "Leabhar Sheáin Í Chonaill" a zo bet adembannet e 1964 hag e 1977. Setu bremañ an embannadur e saozneg deut er-maez. Bez e kaver, a-hed ar 400 pajenn a zo d'al levr, istorioù, mojennoù, kontadennoù-epubl, barzhonegoù, troioù-lavar hag all ... Desket en doa Ó Conaill kement-se gant konterien a-vicher 'vel ma oa kalz anezho c'hoazh en Iwerzhon e penn-kentañ ar c'hantved.


Ganeteo bet Sean Ó Conaill e 1853 e Cilllialaig, Iweragh, e Bro-Kerry (Iwerzhon). Eno e varvas e 1931; n'en doa kuitaet ar vourc'h nemet ur wech evit mont d'ar foar da g-Killorglin. Kement a gaver el levr a zo bet dastumet gant Séamus Ó Duilearga etre 1923 ha 1931. D'ar c'houle-se, avat, ne oa ket a son-enroller c'hoazh, setu e oa dav-mat da Ó Duilearga skrivañ ar pezh a veze kontet gant Ó Conaill. (Ur gontadenn hepken, "old woman of Béarra" pajenn 219, a zo bet enrollet gant un "edifon").

Klask displegañ al levr a vefe evel klask lavarout petra eo ar "Barzhag Breizh" ha dastumadoù kontadennoù An Uhel, ha me oar me ! ... Un dlead eo evit an neb a oar lenn saozneg prenañ al levr-se. Abaoe pell eo bet prenet (emichañs) gant ar re a oar iwerzhoneg..

PSI-KOZH-NOE...



# GERIOU KROAZ



1 2 3 4 5 6 7 8  
 I P O B E R I E N  
 II A M E N I S O  
 III L A R T T N  
 IV L A V A G N O N  
 V E N E N N  
 VI N A V A R R A D  
 VII N A D N A N T

## A-LED

- I - A-hed ar mor
- II - Kevarc'h kozh - Begelier
- III - Skrivagner breizhek
- IV - Laboused-mor
- V - Ivez fonetek bigoudenek - Fank dibennet - Rannig nac'hañ
- VI - Bourc'hadenn a Vro-Lec'h
- VII - Ouzh taol da skouer - Muioc'h ejet a-walc'h
- VIII - Unan habask a zo

## A-SERZH

- 1 - Benveg sonerezh
- 2 - Dibenn rusianek - Moneiz
- 3 - N'eus ket a zibab gantaf -... Ben Aur -
- 4 - Gren ha ...
- 5 - Reoù pevarzroadek a zo
- 6 - Barr uhelder ur blanedenn
- 7 - Oded a-dreuz
- 8 - Bezañ kozh - Prof
- 9 - Ger-mell - Da skrivañ war c'horre



PSI-KOZH-NOE .... (gant ar vreurdeur PAR ha No)



## KEMENNADENN AN F.B.R.L.P.

### KEVREDAD BREIZH AR SKINGOMZIOU LEC'H HA ERO

Hiziv an deiz, pa'z eus un toullad mat a skingomzioù lec'h o klask war-lerc'h gwenneien evit mont en-dro, e fell d'an FBRLP kemenn en-dro e nac'ho krenn degemer arc'hant a zeufe diwar vruderezh ha kement-se evit meur a abeg.

Degemer bruderezh a vefe kontrol da ziazez ar skingomzioù lec'h, pa lakfe anezho da sentiñ ouzh lezennoù kenwerzh ne vijent ket mestr warno, ha padal, e fell dezho kentoc'h, bezañ ur gwir servij poblek da gelaouiñ ha da stummañ.

Da eil, degemer bruderezh a gasfe anezho buan da vont davet ar stalioù bras a goñvers, ar re nemeto a c'hello paeañ war hir dermen. Kement-se ne c'hell ket mont gant adsav ekonomikel ar broioù diwar ar maez a zo ivez politikerezh ar skingomzioù lec'h.

Hag erfin, peogwir ec'h en em ranno dioutañ e unan marc'had ar bruderezh etre ar skingomzioù lec'h hervez reolennoù evel niver selaouerien pep hini anezho. Diwar se, ar re vihanañ n'o defe ket o lod.

Dre ma soñj dezhi bezañ ur servij publik poblek, an FBRLP a c'houlenn bezañ war-un-dro anavezet evel-hen ha skoazellet e-keñver arc'hant gant ar penna-durezhioù.

Evit ar pezh a sell ouzh rannañ ar yalc'had gouestlet d'ar skingomzioù lec'h, e soñj dezhi, an FBRLP, ez eo direizh reiñ ar nemestra d'an holl skingomzioù o deus bet an aotre da skignañ. Kinnig a ra un nebeut reolennoù evit ma vefe skoazellet da gentañ ar re-mañ :

- ar skingomzioù lec'h, ganto ur framm hervez al lezenn, a warezfe an demokratelezh hag a vefe liestu.

- ar re a rento servij d'ar selaouerien.

- ar re a roio keleier eus al lec'h.

- ar re a vo ur benveg stummañ evit ar selaouerien kaozioù.

- ar re a roio an tu d'ar re yaouank ha d'ar re "na glever morse", da zispakañ o sonj, hag a vo ouzhpenn ul liamm etre ar rumadoù tud a oad dishenvel.

- ar re a glasko bezañ ul lec'h emgav war an dachenn sokial.

- ar re a vo ur benveg ouzhpenn evit diorren ar c'horn-bro war an tachennoù ekonomikel, sevenadurel ha sokial.

- ar re a vo stag ouzh ur raktres a ziorradur hollek er vro e lec'h ma vint.

Evit ma vefe un digreizennañ gwirion eus ar galloud e c'houlenn an FBRLP e vefe diazezet kuzulioù rannvro evit ar sellet ha klevet, ganto ar galloud da zivizout, ha kuzulioù lec'hel, muioc'h a skiant prenet ganto evit pezh a sell ouzh doareoù al lec'h, a vefe gouestoc'h da rannañ an hirder-gwagennoù etre ar skingomzioù ha da deurel evezh e vefe doujet ouzh an disentezioù, kemeret, 'pezh ne vez ket graet bremañ dre ma n'ez eus galloud gant den d'hen ober.

FBRLP : Ti-Kêr Lanruen  
 22480 ST NIKOLAZ AR PELEM  
 Lizhiri ha pellgomz :  
 Fabienne LECOIN  
 Radio-Vilaine  
 22, straed Brest  
 35000 ROAZON  
 PELLG : (99) 54.29.78.



HE! O! FRAIED  
TANVAET 'PEUS, AR  
BOJOLPIF! UL LIPE-BAV!  
ALE HOP! GWER  
WAR AN  
DAOL!!

SELAOU! LOEIZ! TRAOU  
POUEZUSOCH 'ZO EGET  
BLAS AR BOJOLPIF  
NANN!!

GWIN AR  
C'HALLAOUED!!

DAZONT  
EBET!

FURUKIN!



STOURM POBL VREIZH  
AN DEIZ A HIZIV! DISONJ-  
ET 'PEUS, MARTEZE!  
PAV KAOL!!

NAG AR RE  
DILABOUR!

STAD AN  
EMBANN!

HE! O! KOUL!

STAD!  
RENNAIS!

NAG AR C'HAPES  
BREZHONES? PEUR 'VO  
ROET  
DEOMP?

DIWAN  
EN  
DESKAD  
C'HALL?

NANN.




N'EUS KET A BLAS 'VIT  
AR RE WAN HA LAOSK 'TOUEZ  
STOURMORIEN HOR POBL!!!

**JOUARF!!**  
SAPRE LOEIZ!!!



YA! MAT EO!  
SALUD! DAR CHENTAN  
GWEL!!



GREDMP UN TANVA  
HASTA FO!

NEUS KET BIER?

HE!  
HE!

DISTRO ON DA  
GERCHAT MA GWIN  
... DISONJET AM...

GWIN?  
SELLTA!  
PESEURT  
GWIN?



Tudm